

DIGORADUR

Ar brezhoneg zo un tamm eus liesseurtes yezhel ar bed, anezhi un dalvoudegezh a bouez bras hag a zo gwarezet gant meur a destenn etrebroadel¹. Tostoc'h dimp, ez a ar brezhoneg d'ober unan eus abegoù kenstaged ar gevredigezh pa liamm an eil remziad gant egile. Sichenn hor brezhadelezh eo. Diorren implij ar brezhoneg a c'hall degas kalz implijoù er vro ivez.

Ofis ar Brezhoneg, bet krouet e 1999 diwar intrudu Kuzul-rannvro Breizh gant skoazell Ministrerezh ar Sevenadur, zo e bal termeniñ ha seveniñ an obererezhioù a ranker kas da benn evit brudañ ha kas ar brezhoneg war-raok war bep tachenn eus ar vuhez sokial ha foran. Sevel ur strategiezh a-benn suraat diorroadur ar brezhoneg war hir-amzer a glot da vat gant e gefridioù eta.

Gwall vresk eo dazont ar brezhoneg hiziv an deiz, anat eo ! Gant Danevell Arsellva an Ofis, "Un avenir pour la langue Bretonne ?"², ha gant ar studiadenn kaset da benn gant an EBSSA diwar niveradeg 1999³ ez eus bet roet sklêrijenn a-walc'h war emdroadurioù nec'hus ar yezh. Hervez an UNESCO emañ ar brezhoneg e-barzh rummad ar yezhoù "en arvar bras da vervel"⁴.

A-benn kadarnaat an demokratelezh eo kinniget ar steuñv diorren gant an Ofis diwar c'houlenn Kuzul-rannvro Breizh. Fellout a ra dimp e vefe efedus ha diouzh stad ar brezhoneg a vremañ, gant palioù uhelek met a c'hall dont da wir ac'hann da 2015.

*Lena Louarn
Prezidantez an Ofis*

¹ s.a. Feur-emglev etrebroadel war ar gwirioù keoded hag diliteel – Broadù-Uharet (1966), Kendivizad war gwirioù ar vugale (mellad 30) (1989), Karta Europa ar yezhoù rannvropelel-hanniver (1992)

² "Un avenir pour la langue Bretonne ?" Arsellva Ofis ar Brezhoneg Here 2002.

³ "Langue bretonne et autres langues : pratique et transmission" e-barzh *Quartier n° 92*, EBSSA Breizh, Genver 2003.

⁴ «Redbook on endangered languages» : UNESCO 1993.

STAD A VREMAÑ AR BREZHONEG

Dielfennañ resisoc'h stad ar brezhoneg a c'haller ober gant danevell Arsellva ar brezhoneg an Ofis « Un avenir pour la langue bretonne ? » zo bet kadarnaet gant disoc'hoù niveridigezh an EBSSA diwar-benn implij ar yezhoù e Frañs.

300.000 brezhoneger bennak zo hiziv an deiz e 5 departamant Breizh, da lavaret eo 8% eus poblañs Breizh (11% e Rannvro Breizh). Koshoc'h eget 60 vloaz eo an div drederenn anezho avat.

Ar sifroù-se, hag a c'hall lakaet ac'hanomp nec'het, a rank bezañ lakaet e-kichen hini an 8 877 bugel skoliataet er skolioù divyezhek (+115 % abaoe 1997) hag an 8 000 oadour bennak zo o teskiñ brezhoneg. Ganeomp emañ an diazezoù evit nevezin an treuzkas etre rummadoù. O c'hreñvaat zo d'ober avat. Re a vugale n'hallont ket tostaat ouzh ar brezhoneg c'hoazh ha skouer Kembre a ziskouez deomp ez eo 24.000 oadour zo o teskiñ ar yezh keltiek en tu all da Vor Breizh en ur boblañs zo en tu-mañ da 3 milion a annezidi... Frammañ gwelloc'h an traoù hag embann ur youl splann d' o diorren, se eo ar pal e Breizh.

Betek bremañ ez eo diazezet ar pep brasañ eus diorroidigezh an deskadurezh divyezhek pe war ar sevel skolioù kevredigezhel gant ar rouedad Diwan pe war labour kevredigezhioù tud ar vugale an deskadurezh publik (Div Yezh) pe brevez (Dihun). Dellezek eo o striv da vezañ harpet muioc'h bremañ gant an ensavadurioù, ar pezh a roio an tu da vont war-raok seder war diazezoù yac'h ha da vont dreist d'ar c'hrogadoù zo bet er bloavezhioù tremenet, lakaet war wel gant kalz a vanifestadegoù er bloavezhioù diwezhañ.

A-hend-all, pa weler ar brezhoneg o kavout e blas tamm-ha-tamm en endro yezhel meret gant ar strollegezhioù lec' hel, e c' haller kregin ivez da gaout spi. Krog eo bed an ekonomiezh da heuliañ ivez evel m' en diskouez splann berzh ar c' houlzad "Ya d' ar Brezhoneg", bet sinet gant ouzhpenn 500 aozadur eus ar gevredigezh en he fezh. Bresk e chom an araokadennoù avat hag an divyezhegezh, pell a vezañ sistematek, a chom c' hoazh re alies disoc' h divizoù bet kemeret un tamm dre zegouezh, ar pezh a vir ouzh ar yezh a vont war-raok da vat.

A-du emañ an dud gant kas ar yezh war-raok. An enklaskoù kedveno a ziskouez ez eus 90% eus ar Vretoned o deus c'hoant e chomfe bev ar brezhoneg, ar pezh a zo ur cheñchamant krenn eus o ferzh e-keñver ar bloavezhioù tremenet. An daou enklask a oa bet kaset da benn gant Arsellva Ofis ar Brezhoneg er 1500 kumun a Vreizh e 1999 hag e 2003 a ziskouez ivez e soñj 88 % eus an dilennidi o deus respontet ez eo ar brezhoneg "ur merk hevelebiezh talvoudekaus evit an holl Vretoned, ha pa ne ouifent ket ar yezh". Heñveldra pa gaver 83 % anezho o sevel a-du evit lavaret ez eo ar brezhoneg "ur merk hevelebiezh talvoudekaus evit Breizh a-bezh". Kement-se holl a ziskouez splann e sav a-du ar Vretoned evit ma vo lakaet e pleustr politikerezhioù yezhel youlek e Breizh.

Perzhioù kreñv ha gwan zo e bilañs stad ar brezhoneg. Nec'hamant ha spi a vez tro-ha-tro pa soñjer e dazont ar yezh keltiek nemeti war douar-bras Europa. Sklaer eo n'eus nemet ur steuñv war meur a vloaz a c'hallo gwellaat stad ar brezhoneg ha, war un dro, respont d'ar goulenn zo er gevredigezh.

PERAK UR STEUÑV ?

Er stad m'emañ ar brezhoneg hiziv an deiz ez eo ret lakaat da dalvezout ur **politikerezh yezh**, da lavaret eo ur politikerezh foran da harpañ ar yezh.

Efedus e rank bezañ ur politikerezh yezh, evel n'eus forzh peseurt politikerezh foran. Kement-se a dalvez e rank bezañ bet termenet sklaer ar palioù da dizhout, tachenn ha tachenn, hag ez eo bet steuñvekaet ar barregezhioù, an amzer hag an arc'hant ret, d'o implijout diouzh ar gwellañ. A bouez bras eo ivez gallout priziañ ingal ar pezh zo bet kaset da benn. N'eus nemet evel-se e c'haller gouzout daoust hag efedus eo bet an oberoù pe get ha daoust ha ret eo cheñch hent da espern amzer hag arc'hant.

Kalz a draoù zo bet graet e Breizh. Ar Stad, ar Rannvro, an Departamantoù hag ar strollegezhioù all a zegas o skoazell da strivoù a bep seurt a-benn degas startijenn en-dro d'ar brezhoneg. Ur sell hollek war an holl oberoù-se zo bet graet en emglev stagadenn d'ar gevrat-steuñv a denn d'an divyezhegezh galleg-brezhoneg. Ret eo dezho dont da vezañ kempoelloc'h. Ret eo, da skouer, dasparzhañ al labourioù en un doare sklaer etre al liveoù disheñvel evit tizhout palioù bet lakaet asambles gant disoc'hoù a c'haller muzuliañ.

Strivet ez eus da ijinañ ha da steuñvekaat ur politikerezh yezh er broioù zo deuet a-benn da lakaat un termen d' an digresk e niver o yezherien Kebek, Kembre, Friz, Euskadi, Katalonia... Evit kemer an diarbennoù ret da saveteiñ ar brezhoneg, ez eo ret bremañ kemer penn an hent-se, un hent hag a ya kalz pelloc'h eget arc'hantaouiñ ar c'hevredigezhioù sevenadurel ha yezhel.

Diazezet e c'hall bezañ al labour-se war gentelioù danevell Arsellva ar brezhoneg "Un avenir pour la langue bretonne ?"⁵. Kavout a reer en danevell-se, evit ar wech kentañ, un daolenn resis eus stad ar brezhoneg war gement tachenn zo e 2002. Perzhioù gwan koulz ha perzhioù kreñv hor yezh keltiek zo merket enni. An dalc'h bremañ eo gwelet penaos gwellaat ar perzhioù gwan ha penaos mont buanoc'h ha pelloc'h war an tachennoù ma'z eus bet labourer c'hoazh.

Eil lankad un argerzh a zo e bal lakaat posupl un implij naturel eus ar brezhoneg e kevredigezh Breizh eo ar steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg « Brezhoneg 2015 » eta.

⁵ Labour meneged doget.

DOARE SEVEL AR STEUÑV

Ober e vad eus skiant prenet pep hini :

Bezañ degemeret ha sammet gant ar brasañ niver posupl a dud eo pal ar steuñv-mañ. Bet eo Ofis ar Brezhoneg o c'houlenn alioù digant ur bern tud e karg ha tud o labourat war an dachenn. Kuzuliet omp bet ganto war meur a boent ha roet o deus an tu deomp ivez da gomz resisoc'h eus traoù zo. Mennozh ha framm ar steuñv strategel-mañ a oa bet degemeret gant Kuzul-merañ Ofis ar Brezhoneg ha degemeret da vat goude-se gant Emvod Meur Ofis ar Brezhoneg e Landerne d'ar 7 a viz Mezheven 2003.

Ur steuñv hollek o vont war-raok a bazennoù :

O loc'hañ diwar stad a vremañ ar yezh hag o termeniñ palioù a-benn 2015 evit pep tachenn e vez treset ar pennlinennoù gant ar steuñv a ya war-raok a bazennoù. Kompezañ an hent d'ar yezh er stad m'emañ hiziv an deiz eo a reomp ha n'eo ket hunvreal. Ur wech termenet ar pal ez eus ur bazenn eus pep bloavezh : 2005, 2006, 2007, 2008, 2009, 2010, 2011, 2012, 2013, 2014, 2015. Ma ne vez ket tizhet ar pal da bazenn pe bazenn e talvezo kement-se ez eo ret adwelet ar pal pe an doareoù d'e dizhout. N'eo nemet evel-se, o vont pazenn ha pazenn gant palioù stag ouzh ar gwirvoud, met youlek, e vo un dazont gant ar brezhoneg.

Palioù stag ouzh gwirvoud an dachenn :

E 5 departamant Breizh e kas Ofis ar Brezhoneg e kefridi da benn. O vezañ ma n'emañ ket an traoù tamm ebet er memes stad hervez ar broioù, n'omp ket evit lakaat ar memes palioù evit bro Vontroulez pe bro Witreg da skouer. Ret eo kemer e kont pegen diorroet eo ar brezhoneg e pep tiriad. Er c'heñver-se e hañval ar vro bezañ ul live steuñvekaat azas. Setu perak ez eus bet savet ganeomp, stag ouzh ar steuñv hollek « brezhoneg 2015 », un diagnostik ha kinnigoù palioù evit pep bro.

Gant labour diazez Arsellva ar brezhoneg e c'hellomp bremañ loc'hañ diwar gwirvoud yezhel pep bro ha lakaat dezhi palioù o klotañ da vat ganti : pet bugel skoliataet en hentennoù divyezhek e bro Wengamp e 2005 ? Peseurt pal ac'hann da 2006, 2007 ? Peseurt abadennoù brezhonek a c'haller klevet e bro Roazhon ? Peseurt pal a c'haller lakaat ac'hann da 2006 ? Penaos lakaat an divyezhegezh da vont war-raok war vord hentoù ar Mor-Bihan ? Mont war-raok e pep lec'h, buan pe vuanoc'h diouzh stad an traoù war al lec'h, eo ar pal eta.

Arabat disoñjal kennebeut an nerzh dizimplij a zo eus ar Vretoned o chom e-maez Breizh, e bro Bariz da skouer. Kalz a vrezhonegerien n'o devez ket tro d'ober gant o yezh ha kalz a zanvez yezherien nevez a zo eno.

AN ARGERZH SEVEL AR STEUÑV

- **8 a viz C’hwevrer 2003 e Plañvour**

Kuzul-merañ Ofis ar Brezhoneg a ziviz labourat war ur steuñv diorren ar brezhoneg : diouzh un tu ur steuñv hollek ha diouzh un tu all steuñvoù dre vro (29 bro evit ar pemp departamant).

- **12 a viz Ebrel 2003 e Plañvour**

Endervezhiad labour ar C’huzul-merañ war ar steuñv. Framm ar steuñv degemeret da vat.

- **14 a viz Mae 2003**

Poent war stad al labourioù gant Burev an Ofis.

- **7 a viz Mezheven 2003 e Landerne**

Emvod-meur Ofis ar Brezhoneg : 3 strollad-labour o klotañ gant an tri fal lakaet :

- Stabilaat niver ar vrezhonegerien
- Digeriñ tachennoù nevez d’ar yezh
- Gwellaat doare ar yezh implijet

Stad ar steuñv degemeret gant an Emvod-meur ha kefridi roet d’ar C’huzul-merañ da gas al labour da benn.

Labourioù izili an Ofis kemeret e kont.

- **13 a viz Gwengolo 2003 e Plañvour**

Poent war stad al labourioù gant ar C’huzul-merañ.

- **2 a viz Here 2003 e Pondi**

Poent war stad al labourioù gant ar C’huzul-merañ.

Kinnig ar steuñv da Vodad ar Sevenadur e Kuzul-rannvro Breizh.

- **Miz Du 2003**

Kaset eo ar steuñv da Guzul Skiantel Ofis ar Brezhoneg a gaver ennañ Skol-veur Breizh-Izel, KEBK, Skol-veur Roazhon II, ar Greizenn Enklask war Breizh hag ar Broioù Keltiek e Roazhon II, an ESSM, TES.

Ar steuñv kaset d’ar c’hevredigezhioù amañ da heul : Kuzul Sevenadurel Breizh, Skol-Uhel ar Vro, Dihan, Div Yezh, Diwan, UGB, DAO, Stumdi, Dastum, Dizale, CORLAB, Radio Kerne, Arvorig FM, Radio Bro-Gwened, Radio Kreiz Breizh...

Derc’hel kont eus evezhiadennoù ar c’hevredigezhioù.

- **4 a viz Du 2003 e Kemper**

Emvod kinnig ar steuñv e Ti ar Vro Kemper. Labour war ar steuñv evit Bro-Gerne (20 den o kemer perzh).

- **15 a viz Du 2003 e Karaez**

Devezhiad labour ar C’huzul-merañ war ar steuñv.

- **22 a viz Du 2003 e Lesneven**

E Lesneven : Emvod kinnig ar steuñv e Ti ar Vro Bro-Leon (kevredigezhioù bro Lesneven). Labour war ar steuñv evit bro Vrest (un tregont bennak a dud o kemer perzh, emvod e brezhoneg penn-da-benn).

E Brest : Emvod kinnig ar steuñv e ti Sked. Labour war ar steuñv evit bro Vrest (25 den bennak o kemer perzh).

- **25 a viz Du 2003 e Roazhon**

Kinnig ar steuñv evit bro Roazhon d’ar strollad-labour „ar yezhoù e kêr“ eus ar C’huzul aliañ war ar vreizhadelezh.

- **6 a viz Kerzu 2003 e Pondi**

Kinnig ar steuñv da Guzul-merañ Kuzul Sevenadurel Breizh.

- **10 a viz Kerzu 2003**

Kinnig ar steuñv d’ar gazetennerien e ti Kuzul-rannvro Breizh.

- **Kerzu 2003 – Deroù 2004**

Kenderc’hel da ginnig ar steuñv a vro da vro.

3 FAL

52 OBER

Lakaat asur diorroidigezh ar brezhoneg eo amkan pennañ ar steuñv-mañ.

Tri fal zo da vezañ tizhet :

- PAL KENTAÑ : STABILAAT NIVER AR VREZHONEGERIEN
- EIL PAL : DIGERIÑ TACHENNOÙ NEVEZ D'AR YEZH
- TREDE PAL : GWELLAAT DOARE AR BREZHONEG EN IMPLIJ

Liammet strizh eo an tri fal-se. Pa vo gallet bevañ e brezhoneg e-maez ar salioù skol e vo aesoc'h ivez kaout lec'hioù deskiñ nevez. Kresk an dregantad a vugale skoliataet er skolioù divyezhek a lakaio dre ret digeriñ tachennoù nevez d'ar yezh. An aliesañ e vo tu da glevet ha da ober gant ar yezh ar gwellañ e vo live ar yezh dre vras. Chom hep plediñ gant unan eus an tri fal-se a vefe kement ha bezañ sur da c'hwitañ war amkan pennañ ar steuñv.

Meur a ober a vo kaset war-raok evit pep hini eus an tri fal, en ur dermeniñ sklaer kefridi pep perzhiad evit o zizhout.

PAL KENTAÑ :

STABILAAT NIVER AR VREZHONEGERIEN AC'HANN DA 2015

Lod a vo souezhet marteze o welet ne laka ket Ofis ar Brezhoneg da bal kentañ kreskiñ an niver a vrezhonegerien. Re izelek e vimp kavet marteze o chom hep gwelet an traoù war un ton uheloc'h. Ma, evel m'eo bet skrivet sklaer er pennad-digeriñ, pal ar steuñv-mañ n'eo ket lakaat hetoù lerc'h-ouzh-lerc'h ha pa vefe plijus soñjal enno daoust ma ne zeuint morse da wir. En eneb krenn, anv zo amañ da sellet ouzh ar gwirvoud evel m'emañ, da dennañ kentel ha da sevel adsav ar yezh kammed-ha-kammed.

Ma teomp a-benn e Breizh da lakaat da vat un termen da zigresk an niver a vrezhonegerien ac'hann da 2015 e kav deomp e vo bet graet ur pezh labour hag e vo bet kaset da benn tennad kentañ an hent a roio an tu deomp da gaout ar spi da welet ar brezhoneg o chom bev evel yezh daremprediñ er gevredigezh.

Gant ar soñj-se eo ez erbedomp un toullad obererezhioù o deus diskouezet bezañ efedus e broioù all eus Europa hag a c'hell bezañ lakaet e pleustr hep diaezamant ebet hiziv e Breizh hep mont a-enep al lezennoù a vremañ. Tennañ a ra an obererezhioù-se da :

1. An deskadurezh skol
2. Alafabetekaat ha stummañ yezherien nevez deuet d'o oad
3. Treuzkas ar yezh er familhoù

En holl dachennoù-se e c'hall oberoù fetis bezañ kaset da benn gant disoc'hoù efedus.

1-a. Anavezout emdroadur an niver a yezherien

γ Ober kentañ : Ober gant an doare nevez da niveriñ ar boblañs evit muzuliañ niver ar vrezhonegerien

Abaoe miz Genver ez eus bet lakaet da dalvezout un doare nevez da niveriñ ar boblañs. Ne vo ket mui niveret ar boblañs en he fezh war un dro bep nav bloaz. Graet e vo gant enklaskoù bloaziek war ur standilhon eus ar boblañs..

Ar c'humunioù enno nebeutoc'h eget 10 000 annezad a vo atav niveret o foblañs a-bezh bep 5 bloaz. Ar c'humunioù enno 10 000 annezad pe vuioc'h a gaso da benn bep bloaz un enklask dre sontadeg war ur standilhon a 8% eus o foblañs. An EBSSA an hini eo a aoz hag a gontrol dastum an titouroù pa vo prietet ha kaset da benn an enklask gant ar gumun.

Un digarez eus ar c'hentañ zo eta da lakaat ouzhpennañ ur goulenn diwar-benn ar fed gouzout ar yezh hag unan all diwar-benn an ober ganti. Ret-groñs eo rak gouzout kement-se eo sichenn forzh peseurt politikerezh yezh.

Goulennerien :

- Stad
- Kumunioù

Oberour :

- EBSSA

Kevelerien all :

- OAB


1-b. An deskadurezh er skolioù

γ 2^{vet} ober : Lakaat niver ar vugale skoliataet er skolioù divyezhek da dremen eus 8.877 da 25.000 ac'hann da 2015

An enklaskoù hag an dielfennadurioù bet kaset da benn gant Ofis ar Brezhoneg diwar-benn an niver a yezherien a ro an tu da gaout ur soñj war stad gwirion an traoù ha da ginnig diarbennoù diazezet war ar stad-se.

A-benn reiñ un dazont d'ar brezhoneg, en ur chom gant palioù diraezus, ez eo ret deomp lakaat da bal tizhout an niver a 25.000 bugel skoliataet en teir hentenn divyezhek a-benn 2015. Lieskementiñ dre 3 an niver a vugale e talvez ar c'hresk-se dre vras. Da zibenn ar prantad 2004-2015 ne vo ket divyezherien eus ar 25.000 bugel-se met war an hent mat e vimp evit kempouezañ koll an 10.000/15.000 brezhoneger a ya da anaon bep bloaz.

Er framm-se e c'haller kinnig ar c'hresk-mañ eus ar sifroù hollek :



Bloavezh	02-03*	03-04	04-05	05-06	06-07	07-08	08-09	09-10	10-11	11-12	12-13	13-14	14-15	15-16
Niv. a vugale skoliataet	8174	8877	9689	10561	11511	12547	13676	14907	16249	17711	19305	21042	22936	25000
Feur kreskiñ (e %)	10.90	8,6	9,15	9	9	9	9	9	9	9	9	9	9	9
Niv. A bostoù ret			54	58	63	69	75	82	90	97	106	116	126	138

*Merket eo ar bloavezhioù 2002-2003 ha 2003-2004 da gaout soñj anezho hepken

Brasjediñ a reomp ez eo muioc'h eget ur 1000 post bennak ouzhpenn zo da vezañ krouet er prantad 2004-2015, da lavaret eo ur c'hant bennak bep bloaz.

Evel ma weler, diaester brasañ ar bloavezhioù zo o tont eo stummañ trawalc'h a gelennerien en ur deurel evezh ouzh o barregezh war un dro. Kement doare zo da dizhout ar pal-se a rank bezañ studiet.

Degasomp da soñj amañ e kinnig an emglev stagadenn d'ar gevrat-steuñv a-vremañ stummañ 50 skolaer ar bloaz ha penaos evit ar bloavezh 2002-2003, ar bloavezh kentañ ma veze lakaet an emglev da dalvezout, n'eo nemet 20 stajiad a oa bet degemeret en ESSM Sant-Brieg. E 2004 ez eo 13 skolaer a zeuio e-maez ar CFP. Splann eo eta an ezhomm da steuñvekaat an traoù hervez palioù resis kenkoulz hag ar ret-groñs m'eo heuliañ ha priziañ ingal an emglevioù.

Goulenner :

- Stad (Ministrerezh an Deskadurezh)

Oberourien :

- Rektorelezh : Tuta kelennerien diouzh ar palioù kreskiñ. Engouestl an ensavadur en ur politikerezh diorren e kenlabour gant ar strollegezhioù.

- E.S.S.M., C.F.E.B., KELENN : stummañ ar gelennerien

- Kuzulioù Akademikel ar yezhoù-rannvro : lec'h kenurzhiañ ha steuñvekaat (kartenn ar skolioù...)

Kevelerien all :

- Ar c'hevredigezhioù a gas war-raok an divyezhegezh er skolioù (Div Yezh, Dihun), rouedad ar skolioù Diwan, U.G.B. (Unvaniezh ar gelennerien brezhoneg) : heuliañ kresk niver ar skolidi ha kemer perzh e savidigezh kartenn ar skolioù.

- Kreizennoù Titouriñ hag Heñchañ : Skignañ dielloù da vrudañ ar micherioù kelenn hag ar micherioù divyezhek all e-mesk an dud der-vras.

- OAB : Heuliañ kresk an niver a vugale pazenn-ha-pazenn a-drugarez d'e Arsella.

Bezañ er saloñsoù liseidi ha studierien gant e Ajañs diorren a-benn kinnig ar micherioù kelenn divyezhek.

γ 3° ober : Kelaouiñ efedus ha kizidikaat ar familhoù d'an divyezhegezh

Re nebeut a dud a oar da vat hiziv an deiz ez eus eus an hentennoù divyezhek gant o fedagogiezh vodern dezho o-unan ha pegen mat ez eo an divyezhegezh abred evit diorroidigezh spered ar vugale.

Ret eo eta kelaouiñ ingal ar familhoù gant kement doare a c'haller kavout : plaketennoù, koulzadoù kizidikaat (kazetennoù pemdeziek, skingomz, skinwel).

Goulenner :

- Stad (Ministrerezh an Deskadurezh)
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberourien:

- Rektorelezh : lec'h kenurzhiañ da sevel an dielloù hag arc'hantaouiñ ar skignañ anezho.
- Kuzulioù Akademikel ar Yezhoù Rannvro : lec'h kenurzhiañ da sevel an dielloù hag arc'hantaouiñ ar skignañ anezho.
- Ar c'hevredigezhioù a gas an divyezhegezh war-raok er skolioù (Div Yezh, Dihun), rouedad ar skolioù Diwan, U.G.B. (Unvaniezh ar gelennerien brezhoneg) : kensevel an dielloù brudañ gant ar rektorelezh.

γ 4° ober : Priziañ da vat ar goulenn deskadurezh divyezhek

Goude bezañ graet a-seurt da vezañ gouest da respont d'ar goulenn ha bezañ kelaouet ar familhoù e vo ret niveriñ en un doare resis ar goulennoù deskadurezh divyezhek e pep skol (divyezhek pe unyezhek).

Kaset e c'hello bezañ an enklask-se da benn e framm ur c'henlabour etre an ensellerezhioù akademiezh, an EBSSA hag ar c'hevredigezhioù a ziorren an divyezhegezh er skolioù.

E dibenn c'hwec'hmiziad kentañ 2004 e vo graet an enklask-se a-benn magañ preder Kuzulioù Akademikel ar Yezhoù Rannvro (unan eus o strolladoù labour a zo e gefridi tresañ kartenn skol an deskadurezh divyezhek). Diazezet e vo evel-se an dibab krouiñ pe ziorren lec'hiad pe lec'hiad war ur goulenn gwiriet war an dachenn.

Ingale e vo kaset an niveridigezh-se da benn.

Goulenner :

- Stad (Ministrerezh an Deskadurezh)

Oberourien :

- Ensellerezhioù akademiezh
- Div Yezh, Dihun, Diwan

Kevelerien all :

- EBSSA : Skoazell deknikel
- Kevredigezhioù o deus da bal kas an divyezhegezh war-raok.

γ 5vet ober : Sikour ar c'humunioù gant arc'hant da zigeriñ lec'hiadoù deskiñ divyezhek

Ur roll hollbouezus o deus ar c' humunioù da c' hoarife sevel ur rouedad skolioù divyezhek dasparzhet mat er vro evit ma vo roet an tu da vat da dud ar vugale da zibab ur skoliata divyezhek.

Gwir eo n' eo ket ar c' humunioù a ziviz digeriñ ul lec' hiad pe ur skol divyezhek. Hollbouezus eo roll frammoù all (an Ensellerezhioù Akademikel da skouer) met hep skoazell ar c' humunioù evit degemer ul lec' hiad divyezhek n' o deus ar raktresoc'hañs ebet da zont da wir. Unan eus an traoù pouezusañ en ali ur c' huzukêr eo an arc' hantaouiñ. Ma c' haller ober a seurt ma ne vefe dreistkoust ebet e-keñver ur c' hlas unyezhek ez a da get aesoc' h an arguzennoù enep an digoridigezh diouzh a lavar an dilennidi a oa bet o kemer perzh er strolladoù labour aozet gant an Ofis (Pondi d' an 28 a viz C' hwevrer hag 21 a viz Mezheven 2003).

Pouezus eo eta e c' hoarife an departamantoù ur roll kempouezañ evel m' en deus kroget departamant Penn-ar-Bed d' en ober.

Goulennerien :

- Kuzulioù-departamant : Skoaziadoù aveiñ roet d' ar c' humunioù a zigor ul lec' hiad divyezhek.

Kevelerien all :

- OAB : Ijinerezh yezh da skoazellañ ar c' humunioù dre e Ajañs Diorren.

γ 6^{vet} : ober Kelenn brezhoneg en deskadurezh eil derez

Kelenn brezhoneg evel eil pe trede yezh en eil derez a chom un doare da reiñ an tu d' en em gavout gant ar brezhoneg da skolidi n' o deus ket bet ar chañsse abretoc' h en o amzer skol.

Taolet e vo evezh bras evit ma vo kelennet en un doare dedennus. Bez' e ank ar c' hinnig kentelioù bezañ dalc' het e lec' h ma' z eus anezhañ, diorroet e lec' h ma n' eus ket evel rakwelet en testennoù reolennañ (ar pezh na vez ket graet atav). Lakaet e vo an holl skolidi hag holl dud ar skolidi da c' houzaout ez eus eus ar c' hentelioù-se.

Goulenner :

- Stad (Ministrerezh an Deskadurezh)

Oberourien :

- Rektorelezhioù

γ 7^{vet} ober : Skoazellañ muioc'h ar produiñ dafar pedagogel

Produiñ ha skignañ danvez pedagogel brezhonek zo unan eus an traoù pouezusañ evit diorren an deskadurezh vrezhonek.

Ur pezh labour zo bet kaset da benn c' hoazh gant TES(Ti-embann ar Skolioù Brezhonek), anezhañ ur skourr eus ar KRDP. Ret eo reiñ an tu d' an aozaduse da broduiñ muioc' h c' hoazh a zanvez pedagogel.

Goulennerien :

- Stad : krouiñ ur post ouzhpenn ha titlañ an implijidi a-vremañ war bostoù ITARF
- Kuzul-rannvro : Kresk a 100.000 €dre vloaz

Oberour :

- T.E.S. : Embann danvez pedagogel nevez, evit al liseoù teknikel da skouer.

Keveler all :

- OAB : Steuñvekaat an ezhommoù a-fet termenadurezh
- Lakaat bodadoù labour da vont en-dro enno kelennerien da gentañ penn
Produiñ geriaouegoù
Kendivizad gant TES

1-c. An oadourien hag ar brezhoneg

E 2003, e oa war-dro 8 000 oadour er c' hentelioùnoz, er stajoù pe enskrivet da heuliañ kentelioù dre lizher e 5 departamant Breizh.

Ret eo diorren ar c' helenn brezhoneg d' an dud deuet :

- evit lakaat un termen da zigresk an niver a vrezhonegerien e-maez ar skolioù
- evit ma vo kement a dud deuet o teskiñ brezhoneg hag a vugale
- evit ma vo diorroet war verr dermen implij ar brezhoneg er vuhez pemdeziek
- evit adstagañ, goude ur pennad, gant treuzkas ar yezh er familhoù

γ 8^{vet} ober : Aesaat ar mont e-barzh kentelioù-nnoz d'an oadourien

Evel ma oa bet krouet ur "chekenn-kazetenn" gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed e c' hallfe ar strollegezhioù lec' hel en em lakaat ahevret evit kemer e karg ul lodenn eus priz an enskrivadur e bloavezh kentañ ar c' hentelioù brezhoneg d' an dud deuet.

Kuzul-departamant ar Pireneoù Atlantel, da skouer, a gemer an 90 eurvezh kentañ kelenn euskareg d' an oadourien e karg.

Mont da heuliañ kentelioù a dalvez ivez brudañ anezho dre goulzadoù skritellaouiñ. Gant an Ofis e vez aozet ur c' houlzad bep bloaz "Deskomp Brezhoneg / Apprenons le Breton" e kenlabour gant DAO. Doareoù all da vrudañ ar yezh a vo studiet (spotoù skingomz, spotoù skinwel hag a c' hallfe bezañ skignet er sinemaoù ivez).

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- Deskiñ d' An Oadourien (DAO)

Kevelerien all :

- Servij Arsella ar brezhoneg OAB a c' hall heuliañ an emdroadurioù dre stadegoù ha priziañ efedusted ar pezh a vez graet.
- Servij Ajañs Diorren OAB a c' hall kemer e karg ar fardañ skoroù brudañ
- An holl frammoù kelenn brezhoneg d' an oadourien

γ 9^{vet} ober : Diorren ar c'hinnig stajoù dibenn-sizhun

Ur pezh labour eo aozañ stajoù brezhoneg en dibennoù-sizhun evit ar gelennerien hag ar frammoù : ret eo bezañ barrek da verañ peadra da gelenn e-pad un devezh pe zaou war un diazez 7 eurvezh kelenn an deiz, kavout an amzer da brientiñ pep tra, aozañ kement tra zo ret e-keñver mont en-dro, brudañ...

Ar pezh a ginniger war an dachenn-mañ :

- krouiñ ur servij a roio an tu d' ur c' helenner da vezañ paeet evit gallout kinnig stajoù en dibenn-sizhun d' ar frammoù.
- diorren stajoù war demoù resis ("tañva d' ar brezhoneg" da skouer) hag a c' hallfe mont a lec' h da lec' h e Breizh ha bezañ kinniget d' an holl frammoù.
- Lañsañ ur galv da ginnigoù er frammoù aozañ stajoù evit broudañ anezho da ginnig ur programm stajoù dibenn-sizhun.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- DAO

Kevelerien all :

- An holl frammoù kelenn d'an oadourien

γ 10^{vet} ober : Diazezañ ur steuñv da stummañ ha perzhekaat ar gelennerien d'an oadourien

Pa seller ouzh an enklask bet kaset da benn e 2003 gant ar gevredigezh DAO hag a stroll ar frammoù kelenn d' an oadourien, un enklask hag a oa bet graet koulz emesk hec'h izili hag ar gelennerien hag ar skolidi, e weler mat :

- E vez diaes d' ar frammoù hiziv an deiz mirout o c' helennerien c' hopret pa n' eus dazont micherel gwirion ebet ganto.
- E tremeno micherelaat ar filieren-se dre ur striv war barregezhioù an dud zo enni.
- E c' houlen ar pep brasañ eus ar gelennerien (82%) devezhioù stummañ (danvez ha teknikoù kelenn, pedagogiezh, krefen yezh...)
- E steuñv stummañ ha perzhekaat ar gelennerien e vo kavet an elfennoù da-heul :
- Priziañ an ezhomm da gaout kelennerien c' hopret
- Aozañ ha kinnig devezhioù eskemm ha stummañ e kenlabour gant ar frammoù lec' hel,
- Embann un deziataer stummadurioù er bloavezh,
- Lakaat en he sav ur reizhiad priziañ ar gelennerien (barregezh war ar yezh, war ar bedagogiezh),
- Talvoudadur an hentad dre grouiñ un diplom a-ratozh,
- Stankaat an emgavioù gant kelennerien o labourat war yezhoù all, gant kelennerien brezhoneg o labourat er skolioù,
- Gwellaat al liammoù hag an darempredoù etre ar gelennerien (forom, kazetenn...)

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- DAO

Kevelerien all :

- An holl frammoù kelenn d'an oadourien

γ 11^{vet} ober : Sevel ur c'hursus hag ur reizhiad gwiriekaat evit an deskiñ gant an oadourien

Sevel ur gwir gursus evit ar brezhoneg diazezet war standardoù Europa.

Lakaat da dalvezout un diplom roet d' an oadourien bet desket ar brezhoneg ganto hag a roio an tu dezho da dalvoudekaat ar pezh o deus desket koulz en ur par personel hag en ur par micherel.

Goulenner :

- Kuzul-rannvro

Oberour :

- DAO

Kevelerien all :

OAB : Kemer perzh e DAO el labour aozañ "Levrig an deskour" oc' h en em harpañ war Portfolio Europa ha war ar "Framm Boutin a Zaveennoù evit ar Yezhoù" bet savet gant Kuzul Europa, kemer perzh en embann hag e skignañ al levrig-se roet evit netra da bep deskour, an holl frammoù kelenn d'an oadourien

γ 12^{vet} ober : Arc'hantaouiñ gwelloc'h ar stummañ micherel war ar brezhoneg

Skouer ar broioù ma vez ar yezh oc' h adc' hounit tachenn (Kembre, Euskadi, Katalonia...) a ziskouez splann pegen pouezus eo ar stummerezh micherel. Kalz efedusoc' h e vez pa ro an tu da c' hopridi da zont da vezañ divyezhek goude un nebeud mizioù stummañ pa vije ezhomm meur a vloavezh kentelioù-noz a-hend-all (gant ur gentel bep sizhun) evit tizhout ul live heñvel.

Emañ c' hoazh arstummañ micherel, evit ul lodenn, e karg ar c' huzulioù-rannvro. An digreizennañ a roio an tu da Guzul-rannvro Breizh da vezañ er penn a-raok war an dachenn-se. D' ar marese e vo tu da :

◇ Greskiñ ar sammad arc' hant gouestlet d' ar stummañ micherel war ar brezhoneg evit reiñ an tu da dud nevez da vont gant an hent-se

◇ Sikour kreñvaat ar c' hreizennoù stummañ

Goulenner :

- Kuzul-rannvro

Oberour :

- OAB : Heñchañ ur strollad labour ennañ an aozadurioù keveler

Kevelerien all :

- Servijoù an A.V.A.L

- Centre National de la Fonction Publique Territoriale

- Deskiñ d'An Oadourien

- An holl frammoù kelenn d'an oadourien

1-d. Alfabetekaet ha mont pelloc'h ganti

γ 13^{vet} ober : Reiñ an tu d'ar vrezhonegerien a-vihanik da vezañ alfabetekaet

Ar vrezhonegerien a-vihanik, evit an darn vrasañ anezho, ne ouzont na lenn na skrivañ o yezh vamm. Lod anezho a vez kavet er frammoù kelenn evit an oadourien met ar re-se a vez kavet enno dreist-holl gallegerien a-vihanik deuet da zeskiñ brezhoneg evel eil yezh : an daou seurt tud-se zo o klask traoù disheñvel met kalz a c' hellont degas an eil d' egile. Poent eo labourat war dafar pedagogel a c' hallfe lakaat an daou seurt deskerien-se asambles hag ivez produiñ dafar pedagogel a-ratozh evit ar vrezhonegerien a-vihanik.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro

- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- DAO

Kevelerien all :

- An holl frammoù kelenn d'an oadourien

1-e. Treuzkas ar brezhoneg er familhoù

Sichenn dazont ar brezhoneg, an treuzkas brezhoneg er familhoù zo erru gwan-gwan hiziv an deiz. O vezañ ma n' as ket trawalc' h gant ar skol ez eo splann ez eus ezhomm da gaout ur servij a-ratozh evit an oad tenerañ. Kalz a labour zo c' hoazh war meur a dachenn.

γ 14^{vet} ober : Diazezañ magourioù brezhonek

Ret eo diazezañ magourioù brezhonek evit ma vo ar brezhoneg ur yezh naturel adalek an oad tenerañ. Hiziv an deiz n' eus nemet div vagouri ma klever brezhoneg (Gouenoù, Landerne). E pep lec' h e vefe ret gellout kavout ur seurt servij.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro

- Kuzulioù-departamant

- Servijoù Gwareziñ ar Mammoù hag ar Vugale er C'huzulioù-departamant

Oberourien :

- Kumuniezhioù kumunioù / Kumunioù

Kevelerien all :

- Kevredigezhioù lec'hel

- Diwan

- OAB : Sevel ur blaketenn da vrudañ an divyezhegezh er magourioù da vezañ skignet en tiez-gwilioudiñ

γ 15^{vet} ober : Skoazellañ ar c'houbladoù a ziviz desevel o bugale e brezhoneg

Ar c' houbladoù yaouank a c' hall bezañ lakaet diaes pa n' emañ ket ganto ar c' heriaoueg rekis evit ober war-dro bugale yaouank pe pa n' o deus ket bet tro d' he deskiñ er c' hentelioù d' an oadourien. ~~Labour~~ hag a levrenn zo deuet er-maez war an danvez-se met n' int ket bet skignet aras.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- OAB : Skoazell-aliañ, kizidikaat an deskourien hag an oadourien yaouank.

An Ofis, dre hanterouriezh e greizenn dermenadurezh TermBret a c' hallfe c' hoari ur roll kenurzhiañ ha skignañ ar c' heriaouegse. Un arouez a zoare e vefe eus adlañs an treuzkas brezhoneg er familhoù.

- An holl frammoù kelenn brezhoneg d' an oadourien aozañ stajoù tematek a-benn perc' hennañ ar c' heriaoueg resisse.

Keveler all :

- DAO

γ 16^{vet} ober : Diorren an tostaat d' ar brezhoneg evit an diaspora

E pep lec' h er bed emañ ar Vretoned. Tomm e chomont peurliesañ d' o bro c' henidik. Pouezus eo etrebroadelaat bezañs ar brezhoneg ha lakaat anezhañ da vezañ e darempred gant ar muiañ ar gwellañ a yezhoù all. Deskiñ brezhoneg a c' hall bezañ un doare da zistreiñ da Vreizh evit kalz a Vretoned. Ur perzh ha n' eo ket dister en deus da gaout diaspora ar Vretoned en adreiñ startijenn ar brezhoneg.

Ober gant an teknologiezhioù nevez a ro an tu da ginnig hentennoù deskiñ efedus forzh pelec' h war ar blanedenn a drugarez d' *are-learning* pe deskiñ dre ar genrouedad. Ret eo soñjal en doare-se ar c' hentañ ar gwellañ.

Goulennerien :

- Stad
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberourien:

- D.A.O.
- Frammoù kelenn

Kevelerien all :

- Stur
- OAB

γ 17^{vet} ober : Aesaat an tostaat d' ar brezhoneg evit an annezidi nevez e Breizh

Kement den zo o chom e Breizh a zle kaout an tu da zeskiñ brezhoneg ha d' ober gatañ, ha pa vefe breizhat a orin pe get. Un doare da vezañ tostoc' h ouzh poblañs ar vro eo deskiñ brezhoneg.

Poent eo prederiañ war an doareoù gwellañ da dizhout deserien e metier nevez.

An hini kentañ eo prientiñ dafar pedagogel da gizidikaat an dud ouzh ar yezh ha danvez azas da zeskiñ ar yezh. Ar saoznegerien, arabegerien ha berbegerien zo e-touez ar re gentañ a c' hellfe ober o mad eus kement-se.

Goulennerien :

- Stad
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant
- Kêrioù

Oberourien:

- D.A.O.
- OAB

γ 18^{vet} ober : Ober a seurt ma vo muioc'h a studiadennoù sokioyezhoñiel a-zivout an divyezhegezh brezhoneg-galleg

N' eus ket kalz a studiadennoù sokioyezhoñiel e BreizhHollret int koulskoude a-benn gwelet ha kompren stad an traoù en un doare objektivel. Mat e vo eta broudañ ar seurt labourioù da live ar skolioù-meur.

Goulenner hag oberour :

- Skolioù-meur Breizh

EIL PAL : DIGERIÑ TACHENNOU NEVEZ D'AR YEZH

Daou seurt tud dreist-holl a ra gant ar yezh hiziv an deiz :

- Ar re gozh, ar re niverusañ, a zo kustum da vont e brezhoneg etrezo mes kazi bepred war an dachenn brevez, hini ar vignoned hag an dud anavezet mat.
- Ar vugale, ar re yaouank (an dazont...) o devez tro da gaozeal brezhoneg er skol dreist-holl, e klasoù divyezhek an teir hentenn Dihun, Div Yezh, Diwan.

Dre al labourioù zo bet kaset da benn en Europa hag en Amerika e ouzomp holl ervat penaos n' eus ket trawalc' h gant ar skol na gant ar vuhez prevez evit ma vevo ha ma vleunio ur yezh. Ret groñs eo lakaat ar yezh da vont e-maez ar skolioù. Ret eo d' ar brezhong adkavout e blas e lec' hioù m' en deus kilet ha kavout e blas dec' h ma n' eus ket anezhañ evit ar mare.

Bez' e tlefe ar brezhoneg gallout bezañ implijet war gement tachenn zo. Ar vugale a zlefe gallout ober sport, sonerezh e brezhoneg. Ar strollegezhioù a zlefe teurel evezh da ziorren o servijoù e brezhoneg. Bep bugel a zlefe gallout lenn romantoù, bannoù-treset, sellet ouzh tresadennoù-bev, filmoù, merdeñ war ar genrouedad... e brezhoneg. Bez' e tlefe gallout klevet tud deuet o komz brezhoneg en ti-kêr, war lec' h labour e dud... Bez' e tlefe gallout lenn brezhoneg war ar panneloù heñchañ, ar panneloù bruderezh, war ar stalioù. E berr gomzoù e tlefe ar brezhoneg bezañ da vat ul lodenn eus e endro.

Mat e vefe eta e vefe eus ar brezhoneg war holl tachennoù obererezh mab-den, ar sportoù, an arzoù, ar sevenadur, evel-just hogen ivez bed al labour, bed an ekonomiezh, ar servijoù publik, ar strollegezhioù tiriadel, ar mediaoù, an embann, ar relijion, an teknologiezhioù nevez...

A-benn neuze, pa n' o defe ket muar soñj ober gant ur yezh a eil renk, met gant ur yezh evel ar re all, ar vugale evel an oadourien en em gavo en o bleud evit implijout ar brezhoneg en un doare naturel war ar pemdez. Kement-se a c' houlenn lakaat e pleustr un toullad divizoù a lakaomp amañ dindan.

γ 19^{vet} ober : Broudañ micherelaat ar re a labour da ziorren implij ar yezh

Studiañ ha lakaat da dalvezout doareoù da lakaat an implijoù o tegas servijoù nevez e brezhoneg da vezañ gwir bostoù stabil.

Ur striv bras-tre zo bet graet e-kerzh ar bloavezhioù diwezhañ evit gwellaat ar servijoù o tennañ d' ar brezhoneg (deskadurezh, embann...). Gant an "implijoù yaouank" o vont da get tamm-ha-tamm e vez lakaet ur bern aozadurioù diaes-bras hag ar riskl da vont war-gil a zo bras. Gant ar bresk m' eo arimplijoù o tennañ d' ar brezhoneg ez eo ret klask diskoulmoù.

Strollegezhioù da gemer perzh :

- Stad
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant
- Kêrioù

2-a. Strollegezhioù tiriadel ha galloudoù foran

Bez' e c'hall atav ar brezhoneg bezañ implijet er vuhez foran, e-kichen ar galleg, yezh ofisiel ar Republik. War-raok e c'hall mont ar strollegezhioù lec'hel eta.

Kinnigoù kentañ war an dachenn-se a oa deuet e-kerzh an devezh bet aozet gant Ofis ar Brezhoneg e Pondivi d'an 21 a viz Mezheven 2003 gant dilennidi Breizh.

γ 20^{vet} ober : Kas an emglev *Ya d'ar Brezhoneg* war-raok er c'humunioù

Ar c' humunioù, anezho unan eus lodennoù pennañ ar vuhez foran, o deus ur gefridi da luskañ adperc' hennidigezh ar brezhoneg. Strollegezhioù tost ouzh ar geodedourien hag ouzh o buhe pemdeziek int. Ul lodenn vras eus ar savadurioù foran, ur bern difraeoù melestradurel ha kalz a servijoù a zo en o dalc' h.

O toujañ da framm al lezennoù a vremañ e c' hall dilennidi Breizh ober kalz evit saveteiñ ar brezhoneg ha reiñ ur plas dezhañ e buhez reizh ar gevredigezh : kemer perzh e programm testeniekaat ar c' humunioù "Ya d' ar Brezhoneg" a vo ur c' hammedvez war an tu-se.

An argerzh testeniekaat kinniget gant an Ofis a ro an tu d' ar c' humunioù da zibab ha da dapout ul label hervez pegen pell int prest da vont hag ar pezh int prest d' ober.

E skoazell a zegaso OAB evit kas da benn an oberoù dibabet gant ar c' humunioù. Ul levr da zont er-maez « An divyezhegezh en ho kumun » a ginnig kalz a respontoù d' ar goulennoù pleustrek a c' hall dont gant a dilennidi. Priziet e vo ar pezh a vo bet kaset da benn evit ma vo tu da gaout kred en testeniekaat.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- Ofis ar Brezhoneg

Kevelerien all :

- Unaniezh Maered Frañs
- Unaniezh Maered pep departamant

γ 21^{an} ober : Aesaat anaoudegezh hag implij ar Brezhoneg er servijoù foran, a-drugarez d'ar stummañ dibaouez, hervez youl an dud

Estreget ur plas arouezel e rank ar brezhoneg kaout er vuhez foran. Kement ha gwellaat ar servij rentet eo kinnig servijoù divyezhek er servijoù foran.

E lec' h ma c' haller e vo lakaet an dud da c' houzaout e c' hallont ober o mad eus ur servij ouzhpenn, da lavaret eo un degemer e brezhoneg. Aesaet e vo an deskiñ brezhoneg pe ar gwellaat anezhañ d' an impliji c' hoant ganto stagañ gñ an dra-se e framm ar stummerezh dibaouez. Tamm-ha-tamm e vo lakaet divyezhek kement tra a c' hall bezañ moulet evit an holl.

Goulennerien :

- Strollegezhioù lec'hel

Oberourien :

- OAB : Ijinerezh yezh
- Centre National de la Fonction Publique Territoriale
- Strollegezhioù lec'hel

γ 22^{vet} ober : Saveteiñ glad lec'hanvadurel Breizh

Gallout a reomp saveteiñ anvioù-lec'h Breizh. Evit-se e ranker labourat kalz buanoc'h hervez an hentenn diazezet mat gant Ofis ar Brezhoneg : dastum war an dachenn, renabliñ ar stummoù kozh dre skrid, skoueriekaat , kement-se o vogañ diaz titouroù hollek lec'hanvioù Breizh.

Goulennerien :

- Stad
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant
- Kumunioù

Oberour :

- OAB : Dastum war an dachenn gant Servij ar Glad Yezhel kreñvaet, enrollañ en diaz titouroù (ennañ en tu-hont da 10.000 fichenn c'hoazh) ha labourat gant ar servijoù teknikel lec'hel.

Kevelerien all :

- I.G.N.
- Gladroll
- Kevredigezhioù lec'hel

γ 23^{vet} ober : Sevel ha lakaat da dalvezout buan ur steuñv panellaouiñ divyezhek galleg-brezhoneg, ha pa vefe war an hentoù broadel

Abaoe kreiz ar bloavezhioù 80 ez eus deuet war-wel panneloù divyezhek e Breizh, er c' humunioù ha war an hentoù departamant (Aodoù-an-Arvor ha Penn-ar-Bed). Poent eo bremañ tennañ kentel eus ar pezh zo bet graet betek-henn ha mont war-zu un doare kempoell da labourat evit ar panellaouiñ divyezhek e Breizh. Ar strollegezhioù n' int ket krog c' hoazh da lakaat staliañ tamm-ha-tamm panneloù divyezhek a vo broudet d' en ober afeur ma vo cheñchet ar panneloù en un doare reizh hag ar re zo krog d' en ober a vo harpet da vont pelloc' h.

Er steuñv panellaouiñ divyezhek e vo lakaet an hentoù broadel. Evel e rannvroioù all eus Frañs, lakaat staliañ panneloù divyezhek war vord an hentoù broadel n' eo mui nemet un afer a gempoell gant diorroidigezh an divyezhegezh war an hentoù departamant hag er c' humunioù. Unan eus elfennoù pouezusañ ur politikerezh terkañ yezhel eo ar gweledva yezhel. War an hentoù broadel e vez ar muiañ a dud, reizh eo eta e vefent lakaet divyezhek da gentañ.

A-benn 2010 e vo divyezhek da vat holl hentoù departamant ha broadel lodenn gornôk ar vro. El lodenn reter, o terc' hel kont eus kemmoù sokioyezhoniel ar 21añ kantved e vo divyezhekaet an hentoù pennañ (hentoù broadel, hentoù pennañ an departamant).

Goulennerien :

- Stad
- Kuzulioù-departamant

Oberourien:

- Renerezhioù-departamant an aveiñ
- OAB : enklaskoù lec'hanvadurel ha termenadurel, treiñ, heuliañ an teulidoù betek adlenn ar gobarioù.

2-b. Mediaoù

Liammet eo ar mediaoù etrezo. Hini ebet anezho ne vo lezet a-gostez eta ha pouezet e vo zoken, war ar re aesañ ha marc' hadmatañ ober ganto (kelaouennoù, skingomz). Kalz a gelaouennoù liesseurt, ur servij skingomz a zoare o komz eus kement tra a ya d' ober ar vuhez a vremañ, setu aze diazezoù ret evit mont war-raok war dachenn ar skinwel.

2-b.1. Kazetennoù ha kelaouennoù

γ 24^{vet} ober : Krouiñ ur font da skoazellañ, kreñvaat ha liesseurtaat ar c'helaouennoù brezhonek

Re strizh eo an dibab kelaouennoù brezhonek ha ne zeuont ket er-maez alies a-walc' h evit bastañ da ezhommoù al lennerien nevez. Mat e vo eta arc' hantaouiñ an intrudu a respont da ezhommoù termenet mat, o chom hep ankounac' haat kreñvaat ar pezh a vez embannet c' hoazh (Louarnig, Meuriad, Bremañ...). Ar pep mallusañ a vefe lakaat da zont er-maez ur sizhunieg a geleier, magazinnoù evit holl oadoù ar vugale, adalek an oad tenerañ betek an oadourien yaouank hag ar grennarded, sevel ur magazin gouestlet d' ar vuhez pemdez. Mat e vo ivez teurel evezh bras ouzh an deskerien oadourien hag ober a seurt ma vefe ganto magazinnoù diouzh o barregezh war ar yezh.

Goulennerien :

- Stad
- Kuzul-rannvro

Oberourien:

- Kreizenn-rannvro al levrioù e Breizh
- Ofis ar Brezhoneg

Koust brasjedet: 300.000 €/ bloaz

2-b.2. Skingomz

Ur roll a bouez bras zo gant ar skingomz en argerzh adreñ startijenn d' ar brezhoneg.

Da-geñver ar sontadeg mediametriezh diwezhañ bet embannet e miz Du 2003 e oa bet tu da c' houzout ez eus 86% eus ar Frañsizien o selaou o fost radio bemdez pe dost.

Ur media evit an holl eo ar skingomz ha dre-se dispar evit skignañ yezh pe yezh. Ur roll kevredigezhel a vez c' hoariet gantañ ivez.

Pa vo cheñchet ar steuñv frekañsoù war-dro 2006 / 2007 e vo un digarez brav da vrasaat an takad hertzian goloet gant ar skingomzoù kevredigezhel o skignañ e brezhoneg, ha pa vefent nevez pe da zont.

War-raok e tlefent gallout mont a-drugarez d' o striv da eskemm abadennoù ha da ginnig abadennoù brezhonek d' ar mareoù ma vez kalz a dud o selaou.

Ar cheñchamant steuñv frekañsoù hertzian-se a zle ivez reiñ an tu da sevel ur skingomz brezhonek a servij publik war Breizh a-bezh.

Graet e c' hallfe bezañ d'geñver un adaozadur eus skingomzoù adlec' hiet Radio France e Breizh war un dro gant yezhoù all komzet e Frañs.

γ 25^{vet} ober : Sevel ur skingomz brezhonek publik o skignañ a-hed an amzer war Breizh a-bezh

Goulennerien :

- Stad
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- Radio France : lakaat da vont en-dro ur skingomz hollvrezhonek o skignañ war Breizh a-bezh ac' hann da 2008-2009

Koust brasjedet : 2,5 milion a euroioù.

γ 26^{vet} ober : Kreñvaat ar skingomzioù kevredigezhel a brodu da vat e brezhoneg ha broudañ anezho da genlabourat

Kreskiñ ar skoazell d' ar skingomzoù kevredigezhel zo o produiñ hag o skignañ e brezhoneg
Broudañ anezho da genlabourat muioc' h
Kinnig gwagennoù hertzian a-zoare dezho e-lec' h ma vezont o labourat
Gwellaat ar pezh a c' haller klevet koulz e-keñver kementad hag e-keñver live.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberourien:

- Pol kornôk ha reter ar rouedad skingomz e brezhoneg (Arvorig FM, Radio Kerne, Radio Bro Gwened, Radio Kreiz Breizh)
- Ar raktresoù skingomzoù kevredigezhel da zont.

γ 27^{vet} ober : Emglev da reiñ frekañsoù analogel pe niverel a-benn sevel ur skingomz brezhonek e Breizh

Daoust ma ned a ket war-raok er mare-mañ e c' hellfe teknik an niverel hertzian degas kalz a draoù nevez war dachenn ar skingomz

Ezhomm bras a zo eus ur skoazell bolitikel digant ar C' huzul-rannvro evit lakaat kompren ar CSA emeur o c' hdoz gallout goleiñ Breizh a-bezh gant gwagennoù hertzian da skignañ brezhoneg.

2-b.3. Skinwel

Ret eo kaout abadennoù, hag ar c' hentañ ar gwellañ ur skinwel d'ezh, o komz e brezhoneg diwar-benn traoù a bep seurt hag evit an holl : programmoù evit an tad-kozh koulz hag evit ar vugale-vihan hep ankounac' haat ar grennarded hag an dud o labourat, programmoù digor war ar bed.

Ar vugale, ar re yaouank hag an oadourien o teskiñ ar yezh eo ar palioù strategel da vezañ tizhet gant an abadennoù skinwel.

γ 28^{vet} ober : Ur font da skoazellañ ar c'hrouiñ abadennoù brezhonek (sevel/eilmouezhiañ)

Ar pal eo skignañ abadennoù brezhonek liesseurt o danvez evit dedennañ an holl sellerien ha skignañ trawalc' h anezho evit lakaat ar sellerien da dapout ar boaz da sellet ouz an abadennoù-se (ar re yaouankañ dreist-holl). Eilmouezhiañ kalz a abadennoù a zo ret evit ar mare a-benn kaout trawalc' h a abadennoù da skignañ.

Goulenner :

- Kuzul-rannvro

Oberourien:

- Dizale
- Kalanna

Produerien all :

- F3 Ouest
- TV Breizh
- Chadennoù lec'hel

γ 29^{vet} ober : War-zu ur skinwel brezhonek publik

Gant an teknikoù o vont war-raok e c' haller soñjal e dro en ur skinwel publik brezhonek. Studiañ en-dro ar raktres-se a ranker eta ha pa seblantfe diaes da dizhout war verr dermen.

Sevel ur bodad-labour ennañ an holl gevelerien.

2-b.4. Sinema ha produiñ klewelet

γ 30^{vet} ober : Skoazellañ ar produiñ filmoù brezhonek hag ar produiñ klewelet dre vras

E miz Genver 2004 e oa bet lakaet da dalvezout ur sistem nevez da skoazellañ ar produiñ filmoù hir. Un euro a zeuio gant ar Stad bep tro ma vo bet roet daou euro gant ar rannvroioù, betek ur milion dre rannvro.

Broudet e tle bezañ ar produiñ filmoù berr e brezhoneg evel un doare da ziskouez ur skeudenn vev ha lañsus eus ar yezh.

Strollegezhioù da gemer perzh :

- Stad
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Frammoù da gemer perzh :

- C.N.C.
- Kalanna
- Daoulagad Breizh
- A.P.A.B.

2-b.5. Teknologiezhioù nevez ar c'helaouiñ hag ar c'hehentiñ

γ 31^{añ} ober : Skoazellañ an intrudu e brezhoneg war ar rouedadoù TNKK hag an treiñ meziantoù e brezhoneg

Diorren plas ar brezhoneg war ar rouedadoù TNKK zo un doare efedus kenañ da ziazezañ dazont ar yezh. Ar c'hevredigezhioù n'int ket chomet hep ober netra war an dachere. Ofis ar Brezhoneg, diouzh e du, en deus c'hoazh troet m'ar lec'hienn ha meur a veziant e brezhoneg. Meziantoù diazez a ra c'hoazh diouer koulskoude e brezhoneg (skridtreterezh da skouer) hag an dachenn da vezañ gounezet gant ar brezhoneg war ar Genrouedad zo bras kenañ. Sevel ur rouedad gant kement teul brezhonek a c'haller kavout zo da vezañ graet ar c'hentañ ar gwellañ.

Gant an aez m'eo ober gant an urzhiataerezh evit cheñch dielloù n'eo ket mui er brezhoneg hepken e ranker soñjal met el liezyezhegezh gant un tremen pa garer eus ur yezh d'eben hag ar splet da genlabourat gant yezhoù all. Goude bezañ studiet an ezhommoù, e vo lakaet ur steuñv diorren an urzhiataerezh brezhonek e pleustr.

Goulennerien :

- Stad (Ministrerezh an Enklask, Ministrerezh ar Sevenadur, DGLFLF)
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- OAB : Ur galv da ginnigoù a vo graet gant Ofis ar Brezhoneg d'ar stlennegourien. Mont betek sevel ur servij nevez gouestlet d'an teknologiezhioù nevez en Ofis ar Brezhoneg a c'hallfe bezañ graet.
- Skolioù-meur
- Stur

2-c. Ar gevredigezh

γ 32^{vet} ober : Derc'hel gant ar c'houlzad "Ya d' ar Brezhoneg"

Sinet eo bet an emglev "Ya d' ar brezhoneg" gant tost da 600 aozadur, an hanter anezho embregerezhioù. Diorren implij ar brezhoneg e mont en-dro an embregerezhioù-se eo ar pal. Krouiñ ul lusk nevez, ober a-seurt ma vefe kizidikaet pep framm, m'en em santfe pep hini e karg eus dazont ar yezh, a glasker ober. Lakaat e fichennaoueg chomlec'hioù divyezhek a c'haller ober, da skouer, evit lakaat ar yezh war wel en un doare naturel ha broudañ ur servij publik d'ober ganti. Krog eo an Ofis da vont da welet ar sinerien unan hag unan evit ma raint traoù da vat. Poent eo mont buanoc'h ha pelloc'h. Ha pa ne vefe tremenet nemet div eurvezh gant pep siner bep bloaz, ar pezh a zo ar pep nebeutañ, e talvez memes tra 1000 eurvezh labour....

Goulenner :

- Kuzul-rannvro

Oberour :

- OAB : Kreñvaet e vo e Ajañs Diorren a-benn gallout heuliañ ar sinerien evel ma tere (emgav kentañ mui emgavioù a vare da vare evit heuliañ an divizoù lakaet e pleustr ha dielfennañ an ezhommoù nevez).

Kevelerien all :

- Kumunioù
- Emglevioù bro
- Kevredigezhioù sevenadurel
- Hiniennoù

γ 33^{vet} ober : Sevel ur servij jubenniñ en Ofis ar Brezhoneg

Poent-bras eo gallout kinnig da bep hini komz ar yezh a zibab, hep na vefe lezet den ebet a-gostez, e-doug kendalc'hioù, emvodoù-meur hag emvodoù all. Ur c'hammed a bouez bras evit gwellaat statud ar brezhoneg e vo ar servij-se.

Pourchas dafar skañv da jubenniñ, e lakaat da dalvezout evit an neb a c'houlennno, dre hanterouriezh Ofis ar Brezhoneg a vo un ober a bouez evit adlakaat ar brezhoneg da vezañ ur yezh kehentiñ.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro

Oberour :

- OAB : Sevel ha merañ ur rouedad jubennourien

2-c.1. Bed al labour

γ 34^e ober : Degas tamm-ha-tamm ar brezhoneg e bed al labour

Kefridi an Ofis :

Aesaat implij ar yezh dre broduiñ ar geriaouegi ret hag an dafar yezh azas, gennad ha gennad.

Aozadurioù da gemer perzh :

- Unaniezhioù micher
- Kambroù ar Micherioù
- Kambroù Kenwerzh ha Greanterezh
- Sindikadoù

2-c.2. Amzer vak / Dudiamantoù

γ 35^{vet} ober : Harpañ an dudiamantoù e brezhoneg e-maez an amzer skol

Ouzhpenn an deskiñ brezhoneg hag e brezhoneg ez eo ret krouiñ un endro evit ma c'hallo ar vugale koulz hag an oadourien ober gant ar brezhoneg en o dudiamantoù.

Ur skoazell a-ratozh a vo roet d'ar c'hevredigezhioù a ginnig raktresoù nevez (kreizennoù-dudi, kreizennoù vakañsoù, obererezhioù sport hag arz). Stummerezh ar vuhezourien a vo kemeret e kont ivez.

Hollbouezus eo an obererezhioù-se evit dazont ar brezhoneg evel yezh kevredigezh pa reont al liamm etre al lec'hioù deskiñ hag ar vuhez pemdez. Mat e vo soñjal enno evit ar vugale koulz hag evit an oadourien o teskiñ.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant
- Kumunioù

Oberourien:

- Kreizennoù a ginnig c'hoazh kreizennoù-dudi e brezhoneg (An Oaled, Studi ha Dudi)
- Deskiñ d'an Oadourien (DAO)
- U.B.A.P.A.R.

2-c.3. Sportoù

Mat e vo aozañ obererezhioù sport evit ar vrezhonegerien evel un doare da lakaat ar yezh da vezañ ur yezh kevredigezh

γ 36^{vet} ober : Aesaat implij ar brezhoneg e bed ar sport

Goulennerien :

- Stad
- Kuzul-rannvro

Oberour :

- OAB : Aesaat implij ar yezh dre broduiñ ar geriaouegi ret hag an dafar yezh azas, gennad ha gennad.

Kevelerien all :

- Renerezh ar Yaouankiz hag ar Sportoù
- Kevreadoù sport

2-c.4. Relijion

γ 37^{vet} ober : Aesaat implij ar brezhoneg er vuhez speredel hag el lidoù relijiel

Muioc'h a lidoù e brezhoneg a lufe bezañ. Rankout a reer lakaat anavezout gwelloc'h ar re a vez c'hoazh. Pep eskopti a c'hellfe embann ur wech pe ziv ar bloaz roll an oferennoù brezhonek rakwelet.

Diorren ar c'hatekiz e brezhoneg.

2-c.5. Embann

γ 38^{vet} ober : Sevel ur font da skoazellañ an treiñ e brezhoneg

Mat e vo liesseurtaat ar pezh a vez embannet e brezhoneg en ur lakaat ar pouez war an embann levrioù evit ar grennarded, levrioù aes da lenn ha levrioù pleustrek evit ar vuhez pemdeziek.

Mat e vo ivez kinnig teulioù ha romantoù o tennañ d'o zachennoù studi d'ar skolidi ha d'ar studieren. Evit-se e c'hallfed reiñ lañs d'ur programm treiñ oberennoù lennegezh ar bed pe ledañ deskamant e stumm ur galv da ginnigoù.

Goulennerien :

- Stad (Ministrerezh ar Sevenadur)
- Kuzul-rannvro

Oberourien:

- Kreizenn-rannvro al Levrioù e Breizh
- OAB

Koust brasjedet : 150.000 €/ bloaz

2-c.6. Bruderezh

Ur marc'had tomm ouzh implij ar brezhoneg a zo. Mat e vo lakaat ar wazourien vrudañ (an embregerezhioù bras hag an ajañsoù bruderezh dreist-holl) d'e anavezout evit ma ne vo ket kendalc'het d'ober bruderezh e galleg hepken, ha mont dreist d'ar c'hlichedoù an "diouer a askorusted" hag ar soñjoù enep all.

γ 39^{vet} ober : Diorren plas ar brezhoneg er bruderezh

Kefridi an Ofis :

- Diorren implij ar brezhoneg er bruderezh dre e goulzad « Ya d'ar Brezhoneg » pergen.
- Diazezañ strategiezhioù embregerezhioù dedennus hag efedus, a-benn lakaat an embregerezhioù publik ha dambublik hag ivez an embregerezhioù prevez aroueziusañ d'ober bruderezh e brezhoneg.

2-c.7. Buhez sevenadurel

γ 40^{vet} ober : Muioc'h a zivyezhegezh en darvoudoù sevenadurel

Tost d' ar brezhoneg emañ ar bed sevenadurel en un doare naturel. Hir eo an hent c'bazh koulskoude evit ma vo bepred divyezhek ar panelloù, an dielloù brudañ hag ober a-seurt ma vo klevet brezhoneg e pep darvoud sevenadurel e Breizh. Bez' e c'hellfe ar strollegezhioù lec'hel sellet pizh ouzh an dra-se pa roont arc'hant d'an darvoudoù-se.

Kefridi an Ofis :

- Dre "Ya d' ar Brezhoneg", sinañ emglevioù gant aozerien an darvoudoù-se.

2-c.8. Sonerezh

γ 41^{añ} ober : Skoazellañ liesseurtaat ar produiñ sonerezh e brezhoneg

Pinvidik tre eo an hengoun hag ar c'hrouiñ sonerezh e Breizh. Koulskoude e chom skort ar c'hrouiñ e brezhoneg e doareoù sonerezh evel ar rock, ar blues, ar rap, an techno...

Hollret eo koulskoude evit ma vo dedennet ar re yaouank etre 15-25 bloaz gant ar yezh ha ma chomint feal outi. Gwelet eo bet kement-se e broioù all eus kornôg Europa.

Broudet e vo ar produiñ sonerezh nevez e brezhoneg dre skoazelloù a-ratozh, dre aozañ leurennoù lañsañ...

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberourien:

- Musique et Danse en Bretagne
- OAB

TREDE PAL :

GWELLAAT DOARE AR BREZHONEG EN IMPLIJ

Un troc' h zo bet etre ar rummadoù. Torret eo bet chadenn an treuzkas er familhoù evit an darn vrasañ eus ar Vretoned. Ouzhpenn kaout muioc' h a vrezhoneg e ranker strivañ ivez da wellaat doare ar brezhoneg en implij. Gant ur spered digor hag ur c' hoant degemer ar vrezhonegerien nevez e ranker kregiñ gant al labour-se... Emaomp e penn kentañ un hent a lakaio ac' hanomp da c' hounit tud nevez d' ar brezhoneg. Miliadoù a vrezhonegerien nevez a zlefe en em gavout gant ar re a vremañ er bloavezhioù zo o tont ma teu ar brezhoneg a-benn da gavout e blas e lec' hioù nevez. Poent eo prederiañ en doareoù gwellañ da virout spered ar yezh, da lavaret eo brezhoneg brezhonek.

Ma c' hounez ar yezh tachenoù nevez e talvez ivez e ranko emdrñ buan tre. War veur a dachenn e rankimp diazezañ termenaouegoù a-bezh ha deskiñ ober ganto. Klasket e vo lakaat ar muiañ ar gwellañ a vrezhonegerien da gemer perzh el labour-se. A-benn gallout ober gant ar brezhoneg e forzh peseurt degouezh e ranker kaout ur yezh ken resis ha ken pinvidik ha yezhoù bras Europa.

3-a. Liammañ gwelloc'h ar yezherien nevez ouzh ar vrezhonegerien a-vihanik

γ 42^{el} ober : Diorren ha kenlodañ an obererezhioù kinniget e brezhoneg (e-maez ar stajoù hag ar c' hentelioù)

Meur a gevredigezh hag a framm zo bet o tiorren obererezhioù a ro an tu d' ober gant ar brezhoneg (e maez ar stajoù hag ar c' hentelioù) : prezegennoù, baleadennoù, beilhadegoù, kenstrivadegoù, stajoù kanañ pe c' hoariva.. Liesseurt kenañ eo an obererezhioù-se ha dedennañ a c' hallont a bep seurt tud. Mankout a ra dezho bezañ anavezet e-maez ar framm aozet pe e-maez ar vro ma vezont aozet.

Pal an ober-mañ eo :

- Kenlodañ an taolioù-arnod a vez kaset da benn e Breizh, gwelet e pelec' h ez eus mankoù, eskemm mennozhioù war ar pezh emañ an dud o c' hortoz (brezhonegerien, oadourien o teskiñ ar yezh...) ha war ar pezh a vez graet e broioù all evit yezhoù all hag a c' hallfe bezañ lakaet da dalvezout evit ar brezhoneg.
- Skoazellañ brudañ ha skignañ an obererezhioù aozet
- Klask doareoù all da gas war-raok an ober gant ar brezhoneg (emgavioù gant brezhonegerien, predoù, beajoù...)
- Kensevel ha diorren obererezhioù ha raktresoù da vezañ kinniget un tamm e pep lec' h e Breizh

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberourien:

- DAO

Kevelerien all :

- An holl frammoù kelenn brezhoneg d' an oadourien
- Emglevioù-bro

γ 43^{vet} ober : Diazezañ ur rouedad familhoù brezhonegerien prest da zegemer brezhonegerien nevez

Gant ar raktres-mañ e c' haller diskouez splann e vez graet gantar yezh er vuhez pemdeziek, e-maez ar skolioù. Ur staj en unan eus ar familhoù labelaet a c' hallfe bezañ lakaet e stummadur ar gelennerien da zont, da skouer.

Goulennerien :

- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberourien:

- OAB : Sevel ar rouedad-se dre e ajañs diorren
- Emglevioù-bro
- Frammoù kelenn
- E.S.S.M.

3-b. Aozañ dalc' hoù stummañ

γ 44^{vet} ober : Dalc' hoù stummañ war an distagañ, reizhded ar yezh hag ar mod da zibab an termenou

Ul levezon eus ar re vrasañ zo gant ar mediaoù war doareoù komz ar yezherien. Seul bouezusoc' h a se eo eta e vefe reizh ar yezh implijet ganto evit dazont ar yezh.

Buan-tre e rank ar yezh mont war-raok. An diskoulmoù degaset e bed ar mediaoù evit envel traoù nevez ne vezont ket atav heñvel ouzh re bed an deskadurezh pe hini ar vuhez foran. A bouez bras eo broudañ ar bedoù disheñvel-se d' en em glevet evit ober gant ar memes gerioù

Aozadurioù da gemer perzh :

- Kenlabour etre OAB, ar skolioù-meur hag ar mediaoù evit aozañ dalc' hoù stummañ
- Frammoù kelenn d' an oadourien

3-c. Stummerezh micherel ha skolveurel

3-c.1. Stummerezh skolveurel e brezhoneg

γ 45^{vet} ober : Luskañ stummerezhioù brezhonek e danvezioù all

Klokaat ar c' hursus e brezhoneg eo ar pal, ouzhpenn stummañ gwelloc' h ar studieren a zo e soñj kelenn an danvezioù-se e brezhoneg.

Oberourien:

- Skolioù-meur Breizh
- ESAD
- KELENN

Kevelerien all :

- OAB : termenadurezh

3-c.2. Stummerezh micherel e brezhoneg

γ 46^{vet} ober : Bastañ d' an ezhomm da gaout labourerien perzhekaet ha barrek war ar brezhoneg

Termeniñ ar stummadurioù micherel da ginnig e brezhoneg ha sevel programmoù stummañ ar gelennerien koulz hag an dafar kelenn ret. Tachennoù ar sekretouriezh, ar gontouriezh, an urzhiataerezh, an ober war-dro an dud kozh pe yaouank,... a c' heller menegiñ diouzhtu.

Goulenner :

- Kuzul-rannvro

Oberourien:

- Aozadurioù stummañ micherel

Kevelerien all :

- OAB

3-d. Ober a-seurt ma vo naturel ha pinvidik ar yezh implijet er familhoù

γ 47^{vet} ober : Programm da saveteiñ pinvidigezh idiomatek ar brezhoneg komzet ha geriaouegi an troioù-micher

Tremen mall eo dastum an teñzor-se. Gant ar vrezhonegerien a-vihanik o vont war goshaat ez eo ul lodenn eus pinvidigezh ar yezh a ya da get. Dastum n' eo ket trawalc' h avat. Ret eo soñjal ivez en doare da adskignañ ar pezh a vo bet dastumet a-feur ma vezer o tastum. Gant OAB e vez embannet ur gronikenn bemdeziek en Télégramme da skouer. Mennozhioù all zo da gavout.

Goulennerien :

- Stad (Ministrerezh ar Sevenadur)
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- Spered ar Yezh

Kevelerien all :

- Dastum
- OAB
- Kevredigezhioù dastum lec' hel

3-e. Kas al labourioù geriadurezh war-raok hag adlañsañ mennozh "Teñzor ar brezhoneg"

γ 48^{vet} ober : Adstagañ gant al labour war "Teñzor ar brezhoneg" hag ober a-seurt ma c' hello pep hini ober e vad dioutañ

Teñzor ar brezhoneg (TAB), evel an Trésor de la langue française (TLF), a zo ur geriadur a gaver ennañ pep reveziadenn skrivet eus pep ger eus ar yezh. Sichenn diorroidigezh ar yezh ez eo en tu-hont d' e dalvoudegezh e-keñver glad.

Kroget eo bet c' hoazh al labour divense met chomet eo sac' het dre ziouer a arc' hant.

Ret eo adlañsañ anezhañ oc' h ober æurt ma c' hello pep hini ober buan e vad dioutañ dre ur mont war-raok prederiet mat hag implij an teknikoù modernañ.

Goulennerien :

- Stad
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- OAB : aozadur bleinañ evit studiañ penaos adkregiñ gant al labour e-lec' h ma oa chomet sac' het.

Kevelerien all :

- Skolioù-meur
- An Here

3-f. Saveteiñ ha talvoudekaat an teulioù skrivet e brezhoneg pe diwar-benn ar brezhoneg

γ 49^{vet} ober : Mirout an teulioù skrivet

An holl a oar ez eus hiziv an deiz teulioù skrivet e brezhoneg na vint ket mui evit bezañ lennet gant ar rummadoù zo o tont daoust dezho bezañ miret e levraouegoù. Breskted an teulioù ouzhpenn an diouer a implijidi karget d' ober wao zro a zo penn-kaoz d' an dañje.

Teulioù brezhonek prizius a zo e-kerz hiniennoù. Pa ya an dud-se da anaon e c' hoarvez re alies e vefe strewet an teulioù-se pe distrujet zoken.

Kavout ur respont d' an div gudenñse a zo d' ober ar c' hentañ ar gwellañ.

Soñjal a c' heller en ul lec' h bennak resis, meret gant brezhonegerien, hag a vefe gouest da ginnig ur servij e brezhoneg. N' eus nemet ur seurt lec' h a c' hellfe priziañ ar pezh a zo a bouez evit ar brezhoneg e gwirionez hag a c' hallfe kaout fiziañs an davez donezonerien.

Goulennerien :

- Stad (Ministrerezh ar Sevenadur)
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant
- Kêr ?

Oberour :

- Framm da sevel

Kevelerien all :

- OAB
- C.R.L.B.
- C.O.B.B.

3-g. Steuñvekaat al labourioù termenadurezh er bloavezhioù o tont

γ 50^{vet} ober

War un dro gant ar brezhoneg o kavout e blas tamm-ha-tamm e tachenoù nevez e rank an dermenadurezh mont war-raok. Dre genemglev e tle al labour bezañ graet o vezañ heñchet gant tud a vicher a ouio lakaat asambles an div varregezh ret : yezhourien ha tud a oar eus an dachenn studiet.

TermBret, kreizenn dermenadurezh Ofis ar Brezhoneg a ya en-dro c' hoazh. Bez' ez eus eus ur c'huzul skiantel a gaver ennañ holl skolioù-meur Breizh. Poent eo bremañ kreñvaat TermBret da vat (ur post hepken hiziv an deiz) a-benn bezañ evit bastañ en un doare dereat da ezhommoù kevredigezh Breizh. Talvoudus e vo ar striv-se evit diorren implij ar brezhoneg e tachenoù lañsus : dafar pedagogel, buhez foran, mediaoù...

Goulennerien :

- Stad
- Kuzul-rannvro
- Kuzulioù-departamant

Oberour :

- OAB : TermBret, kreizenn dermenadurezh Ofis ar Brezhoneg a heulio al labourioù o lakaat tremen da gentañ ar re vallusañ.

Kevelerien all :

- T.E.S.
- Bodadoù termenadurezh Diwan

3-h. Lakaat korpus ar yezh e-kerz an holl war skoroù elektronek

γ 51^{añ} ober

Ret eo ober gant an teknologiezhioù nevez evit reiñ un dazont d'ar yezh. Ur vro er penn a-raok eo Breizh war an dachenn-se a-hend-all. Peadra zo ganeomp eta evit soñjal lakaat korpus ar yezh (geriaoueg, termenaoueg, lec'hanvioù) e-kerz ar brasañ niver. Prest eo an diazezoù da vont war-raok war an tachenoù-se en Ofis ar Brezhoneg..

E darempred gant ar Rannvro (programm Mégalis), e c'hallfed studiañ penaos lakaat diazoù titouroù Ofis ar Brezhoneg e-kerz ar muiañ ar gwellañ a dud.

Goulenner :

- Kuzul-rannvro

Oberour :

- OAB

3-i. Kavout doareoù efedus da respont d'ar goulennoù diwar-benn ar yezh : linenn bellgomz « goulennoù diwar-benn ar yezh » embannadurioù, strolladoù skoazell...

γ 52^{vet} ober : Sevel un "hot-line" evit ar goulennoù mallus hag eeun

Ur seurt servij zo bet lakaet da vont en-dro e Kembre da skouer. Reiñ a ra an tu da ginnig ur servij n'eo ket gwall ziorroet e Breizh hiziv an deiz (troidigezhioù berr, gerioù teknikel nebeut anavezet...) hag a laka ar yezh war wel er vuhez pemdeziek.

Kefridi an Ofis :

- Diwar peadra ar servijoù Treiñ-aliañ hag Arsellva e c'hallfe an Ofis kas ar gefridi-se da benn o ouestlañ ur post dezhi

DA GLOZAÑ

Lakaat ar steuñv kinniget er pajennoù kent da dalvezout a c'hallfe reiñ un dazont d'ar brezhoneg a-drugarez d'an oberoù kempoell a erbed..

Kreñvaat ar frammoù zo anezho c'hoazh, pe sevel frammoù zo zoken, a vo ret ha pa ne vefe lakaet nemet ul lodenn eus ar steuñv da dalvezout E renk kentañ ar frammoù da greñvaat emañ Ofis ar Brezhoneg. Langue Bretonne.

Gwellaat ar c'henurzhiañ etre an ensavadurioù evit gwellekaat implij barregezhioù an dud hag implij an arc'hant ne dalvez ket e vefe kavet evit keloù-se an danvez ret da dalañ ouzh skodoù mallusañ ar steuñv hollek-mañ.

Heuliañ ha priziañ an disoc'hoù a ranker ober evit forzh peseurt steuñv. Ofis ar Brezhoneg, benveg politikerezh yezh ar C'huzul-rannvro a zo ar framm hag a zo evit al labour-se.

Hor rummad eo en devo gouezet, e red an Istor, kemer an diarbennoù ret evit ma kendalc'ho da vleuniañ unan eus pinvidigezhioù dibriz Breizh : he yezh.